

1

JY 9

Son

I

Tri dervrez 'zo, abaoe dech,

ya! lariterato

'Maoun o vev a gant bara zech,

ya! lariterato

ya! lariterato gè

ya! laratatouille!

II

Aotrou Doue, na petra rin?

An dour a zo teir les diouzin.

III

Ha va e heuneud a zo er c'hoad,

Ha va bouchal a zo didroad.

IV

va zrebez a zo oek ober

Gand ar marichal e Treger.

V

Ha va zoar a zo e go.

Ha va fillig e Kerargou.

VI

Me am eus choazet eur vestrez,

Eur plac'hig koant kemeneres.

VII

Eur plac'hig koant a-benn ar C'hoad,

Met allas d'in ne d'eo ket mat.

VIII

Hounnez 'ra d'in me ober tout,

Samma va milin, war va choug.

IX

Hounnez 'ra d'in me ober c'hoaz,

Pilat al lann gant va zreid noaz.

2)

X

Diouz ar mintin ha mintin mat,  
Erg an d'ar park da labourat!

XI.

Pa deuan d'ar gêr, gant va bec'h laun,  
N'eo ket c'hoaz savet va "Madam".

XII

Kerchet an eil hag an trede,  
atao emañ en he gwele.

XIII

Sav, a lese, hioz loudeourenn,  
D'ober d'in eur bannne soubenn!

XIV

Pa 'z an d'ar park da labourat  
e teu warlerc'h 'n eur wigourat.

XV

Ha pa vez poazet ar vev  
Hi 'devez dek ha me 'n eur daou!

XVI

Ha ma ve grêt, diouz ma 'z eo dleet.  
Hi 'devez daou ~~ha~~ me 'n befe dek!